

cholori

n^o 17



Kazetenn vizeiek evit ar vugale. Miz Ebrel 1985. 12,00 L.

C.P.A.P. 66052.-I.S.S.N. 07601085. Embannet gant skoazell Kreizenn Vroadel al Lennegezh.

TAOLENN

- P. 3: ar skeudenn guzh.
- P. 4/5: ar goukoug.
- P. 6: Fulupig Fri Furch.
- P. 7: tresañ ha livañ.
- P. 8: bezomp fur, doujomp d'an natur.
- P. 9: c'hoari.
- P.10: milendall.
- P.11: c'hoari.
- P.12/13/14/15: Pikadapa.
- P. 15: Gerioù diaes.
- P.16: Choloc'hoarzhin.
- P.17/18/19/20/21: Saig, mous ar Skrev.
- P.22: Nora ar skiantourez vihan.
- P.23: Daoulagad lemm.
- P.24: Penaos 'vez lavaret ?

Savet eo bet an niverenn-
mañ gant :
 Michèle BEYER.
 Martial MENARD.
 Tudu HUON.
 Daniel an DOUJET.
 Agnès SIMON.
 Marivon BERR.
 Bernez TANGI.
 Linn BOURDIER.
 Silvi DONNART.
 Olier ar MOGN.
 Elen RIVIERE.
 Yvon RAOUL.



Roit din
ma
"cholori"


Paet ho peus ho
koumanant ?

Roit din
"cholori" 'ta!

P'ho po paet
ho koumanant!

Me raio un
askorn
deoc'h!

Ta, ta, ta !..
gouzout a rit
ne vo ket mui
kaset deoc'h ma
ne gavit ket
ur
chekenn
d'an
dimezell
cholori!



- o gwenn
- | orañjez
- ruz
- Δ melen
- + glas
- gwer

AR SKEUDENN

GUZH

Ar Goukoug



Mammig Koukoug kentoc'h eget sevel un neizh (pegen lezirek eo-hi!) he deus dozvet he vi e neizh ul labous all !!



An afer-mañ n'eo ket gwall-salber. Petra an diaoul eo ar vi-se? Bezomp war evezh!



A-boan dinodet, setu ar pezh divergont da deurel ar vou all er-maez!!



Ar gerent dibabet 'zo fier-droch o welet seurt labous en o neizh, met nag a vech evit magañ anezhan!!



Ur miz goude n'eus mui a blas evit ar goukoug en neizh!



mezheven. Brav an amzer. Setu ar Goukoug war hent Bro Afrika!

FULUPIG-FRI-FURCH

emañ Fulupig er gouarnac'had
ec'h ober e droiad-pren...

erel bep
yaou!

tibidi
tibidi



boued a zo da d'arva!...

menam
menam!



Skloujet en deus Fulupig
holl ar boued a oa war an daol!

Begen mat e oa!
Petra 'oa? Kaviar?
Friko-piz? Soubenn
kig-berin?..



"LiPOUSKI"

boued lipous
erit ho ti!

Boued chas!
seizh kant mil
klipo-toull!!


WAOU!
WAOU!



An tog-touseg


da beurdresañ
ha da livañ

Livit
din un
ti brav!!!




Bezomp fur, doujomp d'an natur

1. Barzh ur voest kartoñs foullet, lak ur preñv-glas hag ar blantenn e-lec'h ma peus kavet anezhañ. (amañ eo linad)
2. Lak ur werenn war un ta eus ar voest.



3. Arabat dit disañjal dourañ ar blantenn.
4. goude un nebeut devezhioù e krogo ar preñv-glas da boupenniñ. Dek devezh e pado ar mare-se.
5. Diboupenniñ a raio evit dont da vezañ ur valafenn.
6. losk anezhi da nijal kuit, pe mervel a raio ar valafenn dre zioer a voued.

Mar lakaer lizherenn gentañ pep tresadenn kichen-ha-kichen e kavi ar ur vro getiek...



PiKadapa

A black and white line drawing of a cat lying down on the left and a hen standing on the right, both facing each other. The title 'PiKadapa' is written in a large, stylized font above them, with decorative leafy branches extending from the letters.

Ur yarig
Gwenn he dupenn
O pigosat
Tika Taka
Louesk ar c'heuneud
Er vorenn

12

Ul louarn
Ruz e skouarn
O c'haloupat
Dya Dapa
Louesk al lasoù
Pejou houarn



Ur yarig
Du he naonig
O klask boueta
Tika Taka
Louesk ar c'hefiou
Kollet mik

13

Lan, Lanig
 Ihep lavar grik
 O piltrotat
 Dira Dapa
 Couesk an delioù
 Ket pellik



Fri ha fri
 Int degouezhet
 I o-daou
 Pika Paka
 Dira Dapa
 Petra 'ta?

14



Salud dit
 Tell 'ta piv!
 Penaos 'mañ kont?
 Pokoù, pokoù
 Chuchumuchu
 Kenavo!

GERIOU DIAES

POUPENN : Ur boupenn eo ar voulig vlev a zeu da vezañ ur viskoulenn a-raok dont da valafenn.


POUPENNIN : Dont da vezañ ur boupenn evit ur viskoulenn.

DIBOUPENNIN : Dont er-maez eus ar boupenn.

MORENN : Ar vrumenn pe al latar a zeu diwar ar mor.

OBER TEIL TOMM : Chom diwezhat er gwele diouzh ar beure.

GOURMARC'HAD : Stal vras-kenañ e-lec'h ma kaver pep tra da brenañ.



15

Saig mous bihan "ar Skrev"



Saig en deus gwelet daou zen o skrapañ unan bennak war an aod hag o pignat war vourzh ur vag-dre-lien. Kerkent eo diredet Saig betek ti Fañch, mestr "Ar Skrev". Distreiñ a reont d'an aod met aet eo kuit ar vag-dre-lien. Fañch a nac'h mont d'he heul. An deiz war-lerc'h eo dihunet Saig gant youc'hadennoù ur vaouez, kollët eo he merc'h, Soazig...

c'hoarzhin ... choloc'hoarzhin ... choloc'hoarzhin... cholo

Aes e kave Yann e wele ar beure-se... Ur bam ! Aesoc'h eget ar beureoù all ; ma teuas da soñj dezhañ en e dammig penn e vefe bravoc'h c'hoazh pa c'hellfe chom d'ober teil tomm etre e lifselioù... Ur wech n'eo ket atav eo, neketa ?



Hag eñ ha pellgomz d'e vestr-skol :

— Aotrou, emezañ, Yann a zo klañv ha ne c'hellfe ket mont d'ar skol hiziv.

— A ! eme ar mestr-skol, met piv a zo o pellgomz din ?

— Ma zad ! eme Yann.





Allo! Sapre marmouz!
"...."ar steredenn-vor?
... ur vag dre lien?
N'emañ ket amañ
evit c'hoazh!



Sach war ar fun
Saig! Emaomp
o vont!



Va laoskit da vont
pe ho po bec'h
gant holl
vartoloded
Breizh!



Hust e oa ar mor,...



e-keit-se edo paket bag
ar skraperien en ur
gorwentenn vil



Penaos? n'out ket
merc'h ar Beskont
a Gerskaw!!

NANN!
Soazig eo
ma anv!
merc'h
ur
martolod



n'eo ket
merc'h
ar Beskont
hon eus
skrapet!!



tabut a sav
etre ar skraperien
DAO!



ne c'hellomp
ket ke leuskeel
da vont! re
a oar
bremañ!

gwir a
lavarez!



e-keit-se Soazig a oa deuet a-benn eus he liammoù!



Gwelomp petra zo, e-barzh an trelennoù-mañ




E! Petra 'rez! Soazig troet out da sot!

HOP!

Soazig a lamm en dour yen gant he bag-savetein ...



Ar vag-savetein! honnezh a serijs din 'rat!



An hini kentañ da zont 'barzh a brako ar vâzh war veg e fri



Ha dao! war e benn!...



Ha neuze?


'Tra!
'Tra!

Kaer o deus klask. N'eus den war wel.



Petra a c'hoarvez gant Soazig kollet e-kreiz ar mor? Hag he c'havout a raio Fañch ha Saig?

NORA ar skiantourez vihan




PETRA EO UR C'HASTELL-DOUR ?


Ha gwelet ho peus dija un tour billi-raz savet war ur run pe un uheleñn bennak ? Ur c'hastell kozh eo ? N'eo ket ! Ur mirlec'h-dour eo ! Ennañ e vez miret dour a vez degaset war an uheleñn gant bangounelloù. Ingalet e vez an dour en-dro dre gorzennoù a ya betek holl diez an tro-war-droidoù.

PELEC'H EMAN AN DEN A WELER WAR SKRAMM AR SKINWELEREZ ?

Pell emañ, en ur sal a vez anvet ur studio. Er skinva emañ ar studio-se. El lec'h-hont e vez graet gwagennoù eus mouezh hag eus skeudenn an den a welez war skramm ar bellwelerez. Beajiñ a ra ar gwagennoù en aer. Tapet e vezont gant rastell ar bellwelerez ha treuzfurmet en-dro d'ober mouezh ha skeudenn ! 22



DAOULAGAD LEMM




N'eus nemet daou lestr heñvel-mik
klaskit mat !.....

Penaos e vez lavaret?

Evel-just ne vez ket lavaret (gw. n^o 15): "Yac'h erel ur vagh gwisket."

Lavaret e vez:

Yac'h erel ur pesk.
Yac'h-pesk.



Petra yac'hoc'h eget ur pesk en dour?



- 135 L ar bloavezh- 70 L ar 6 miz.
- 120 L adal an eil koumanant.
- Koum. skoazell, adal 150 L.
- Broioù estren: 1 bloaz 155 L.
6 miz 80 L.

Agnès Simon-Cholori:
Krec'hienn, Plouider,
29260 LESNEVEN

Chekenn en anv AN HERE.



AN HERE

Renerez ar gazetenn: Marivon Berr
Moulet e ti g/Kloatr, mouler e
LANDERNE, Gourhent N 12,
29220, SANT TONAN.